

## Silvestrik.

me moa eur mab Silvestrik ne moa mab nemet-han,  
e neus bed an ardizegez evid e neum enrollan.  
Me meus bed an avantach da vonet d'he goulen ;  
Gant dud a kondition digant e kabiten.

Na pan deveus va goellet e c'he deud d'am c'haouet  
c'hui fel dec'h trompla r'Roue kaouet he soudardet,  
P'a o n'deus bed ar peamant just e dezo monet.

— Me meus eul lapouz lavouenanik hag en kichen va dor  
nag hi e medi eni, en tre daou ven e gor.  
Doc'h an noz a doc'h a vintin ne paouez o fregani.  
— me gare kaout eur galon evel d'ho hini !

Lapoussik laouenanik deus a kichen va dor  
te c'heus plun a diou askel te a nije dreïst ar mor.  
te a iaffe evidon eur vechik d'an arme  
Da vellet Chilvestrik ma medi he buhez.

Chelvestrik na pa welas al lapous a lavaras dean  
Petra zo a nevez ma zoud deud er vro man.  
— Me a zo deud aman a beurs o tad klac'haret  
gouezit eta Chilvestrik, ganeoc'h eman ar chujet.

— Disken te Laouenanik, diskен te var da zaou droad,  
me a skrivo eul liser did da kass dar ger d'am zad,  
gra dean va gourhemenou ~~a lavar te a lavaro deyan~~  
an de man pen daou vlez me arruo gantan.

— tavid, tad klac'haret, tavid na woelit ket  
ho mab zo en arme, den jenerus pepret  
var ben an de man pen daou vla harruo d'ho goelet.

Pa voa an tad klaharet hober kaon e vab  
evoa he vab Chilvestrik e toul an or e sallocu  
— tavit tad klac'haret, tavit na voëllent ket  
Distro ho mab Chilvestrik, a neus bed droug e bed.

Mari Koad, greg Keriou, 13 juillet 1851.